

DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

Nevez-amzer bac'het

*War ma gourvezvank e welan
Kalz gwez ha kalz laboused.
O buhez a arsellan war-c'hed
Bac'het er gêr gant ma unan.*

*An nevez-amzer a zo amañ
Ha dirak ma frenestr 'meus gwelet
E-pad meur a zeiz bremañ
Daou bintig a zo paret.*

*O sevel he neizh emañ un dignous glas
Du-mañ e zeu da gemer blevenn ma c'hazh.
Ar brini-tour a blij dezho ar siminal
Anezho 'meus klevet gwech ha gwech all.*

*Hag an durzhunell-se
Bep deiz emañ o tagañ
Hag o nijal warlec'h ar big-se !
Iskis eo da welañ !*

*Anezho 'meus gwelet,
An holl laboused,
O vevañ o buhez
E-barzh ar gwez*

Sarah (live 3 - SKED)